

# Er Guémené idan goask er Boched

1. Chilaouct tud a vro Pourlet ha james n'ankoéhet ket  
En dud iouank ag hou toareu zou bet goaldrètet merzerezed.
2. Hitler un den kalet ha kri géménas dé zoudardet  
A pe vahereeh doar er Frans, hui n'ho po ket mui truhé er bet.
3. Er hentel sé ou des heuliet, épad pemp plé a vrézel  
E lahein, intannein, laerein, e pep korn ag hun bro Breiz Izel.
4. Léannez ed er Gémené oè bet skarhet ag ou si  
Ul leheg choul, mar zou unan, get en dud goué ag er Jermani.
5. Hag ou hampreu, hag ou skola; get pautred er Gestapeu  
E oè deit de vout un ihuern, klemmeu hirisus kreiz en tauleu.
6. De zé pardon Chapel er hoed, tal iliz vraù Karnasen  
Pemp kant den iouank dastumet, stlejet d'er Gémené a vanden.
7. En de arlerh e oent arriu, dohtu vez ent bahateit  
Ha get boteu ponér, hoarnet, vezé mahet ha flastret ou sreid.
8. Ou daouarn kroézet ar ou hein, ou srém, troeit doh er vangoér,  
Get tauleu bah ha fasadeu, ne n'ankoéhent ket oent ket er ger.
9. Mar grient ré griu get en droug er multrérion arfleuet  
Get her em daule arnehè hag ou horv peur e vezè brèuet.
10. Deit er mez ag en toul fal sé, na pégen oent goalauzet  
Pœn e seuel, pœn é kerhat, ha n'ou doè ket mui tam nerh erbet.
11. Ur vam e oè bet klaskhé mab égorv karget a vlonseu  
Eh oè er goaid, er linen brein è ridek héd ha héd d'é vampreu.
12. Un den peur koet ar é zeuhlin, oè diléhet é zivreh  
Pe n'oè n'em lédet ar er gambr, oè stoket é ben diu peter gueh.
13. Er goaid e ridè a è veg, ag é fri, hag a é dal  
En deu vourèu lan a gounar e skoè arnehon avel chetal.
14. Deu zen iouank e gazalè ou hamarad ivéret  
Met er goard e zail arnehon a hui n'hou po ket hui zikour erbet.
15. Hag er peur keh ar é zeuhlin n'em stléjas d'é ézemant  
En ur ouélein, en ur grial, é kreiz en droug ha brasan tourmant.
16. Ur hrenég bautr a huezek vlé, en dastum oè bet cherret  
Deit étal d'ein, pléget hou kein, deuzek taul bah en doè reseuet.
17. Un den youank kreiz en tauleu ne krè met galuein é vam  
Hag er bourèu e skoè kriuh, stokè ha skoè el un Allemant.
18. Un intanzez, unek kroaidur, e klask hé mab pemzek vlé  
E oè bet chenchet barh en toul, ha goarnet getè épdd pemp dé.
19. Ul lien oè laket en hé beg, hag hé divreh vezè troeit  
Ha barh ér gambr vras etaldi, hé mab e krial pe vezè skœit
20. Hé mab pemzek vlé oè chomet, ha kaset pél doh er gér  
N'hi des bet dœré anehon, truhé erbet doh é oaid tiner.

21. Un aral e oè dihusket, nen doè hoah met seitek vlé  
Ha tauleu bah ar é ziuar, tauleu léren tiu ar é ziskoé.
22. A pe n'em lakas de ouilein, er multrer zaill arnehon  
E zorn ar é vég, ar é fri, lordet ha goaldréttet el ul lon.
23. Un al krouget é hed é dreid, vezè skopet ar é zréim  
Chéchet ar é vleu, ar é varù, fasadeu ha tauleu ar é ben.
24. Un aral ér galéieu sé, e oè koet en dizanspoér  
Get er bœn gollas é spered, ean en em grougas doh er vangoér.
25. Er Boch des ur galon tinér ne faot stagein treid ul lé  
Met trohein divreh ur kroaidur, el en ur barrez tal en Alrè.
26. Pél e vo konzet a Hitler, hag e strollad zoudardet  
Multrérian, torfetourion, ha lies kousierion merhed.
27. Er labourér è kreiz é bark, lies e vezè cherret  
Skœit arnehon, losket é di, ha laeret e vezè e loûned.
28. Victoér brasan er Jermaned e zou maru er Padellek  
Brèuet e gory, é izili, ha taulet en tan eit bout losket.
29. Er heih den sé e Laouelan, e ~~vaué~~<sup>vieué</sup> hemb trouz erbet  
Get e hroég hag é vugalé, ken é cè arriuet er Bochet.
30. Ker er Jerman e houniè ar gein er peurkeh paizant  
Pe gollè get er (patriot) brogarour ean laké en tan er gomenand.
31. O pesort amzer divourus, tristedigeh en hun bro  
Pautred, merhed, kouh ha youank, peb unan uclè arriu é dro.
32. Hun bro e zo bet divoblet ag hé bugalé guellan  
Ha kalz e zou hoah mahagnet, n'ankoehint bean en Allemant.
33. Pautred er Prus, hui e béo en torfêteu e hues groeit  
Hun tro e arruiei euè d'hou lordein, de gerhat ar houtreid.
34. D'er ré ne grédant ket d'en diaul, d'en droug ha d'er fal spered  
E dondet kalon er Prusian nen d'int a viskoah met morgousket.
35. O men Doué penaus vé kavet tud fal ha ken digalon  
De vahatat, de gousiein ou breur ou hoér taulet er prizon.

JULIAN DUPUIS.

NOTE. — Cette gveerz est distribuée gratuitement.

Je l'ai composée dans le but de perpétuer le souvenir des atrocités commises par les tortionnaires allemands dans notre pauvre pays. Ceux qui lisent difficilement le breton, doivent d'abord la lire posément, puis la relire plusieurs fois, afin de bien la comprendre, avant de la chanter.

Je l'ai adaptée à l'air d'une vieille chanson de 1870 que j'ai beaucoup entendu chanter, étant enfant, par de vieilles gens en pleurs « *Huélet me mam beur e ouélo...* ». C'est pour cela que les deux vers de chaque couplet sont de longueur inégale.

J'en autorise la reproduction à la condition qu'elle ne soit pas vendue, car il y a déjà trop de marchands de chansons à exploiter la douleur des familles des malheureuses victimes des Boches.

Gu'méné s/Scorff, ce 1<sup>er</sup> Octobrc 1944.

J. D.

*œ = œ<sup>2</sup>*